

12 ①

SARMOOUN
AR VESVENTI,

RIMET

EVIT INSTRUCTION AR VRETONET,


Er bloas 1839.

Sarmoun etre farçz ha devri,
Composet var ar Vesventi
Gant an autrou *Heb e Hano*,
Eus a barres c'hui zivino?

*Lennit-y tout en hoñtyes
En deiziou araoc Molarges;
Ra vo jve d'ar Sul-Ænet
A boues penn dre-oll prezeguet.*



E MONTROULEZ,
E ty LÉDAN, Imprimer ha Librer.





ŠARMOUN AR VESVENTI.

*Vae vobis potatoribus ;
Mezierrien, c'hui zo malheurus !*

PELL-AMZER zo , auditoret ,
Abaoue ma'meus remerget
Eur viçz oc'h ho tishenori ,
Hanvet dre oll AR VESVENTI .

Eus an oll viçou a ravaich siay a valgâs
Bremâ , siouas ! ar gristeniaich ,
Oumâ eo an difficilla ^{en} bennet an diesc
Eus ar bed da zisc'hrisienna .

Un impadic hac un touer ^{Lundic}
Convertisset ral a veler ; ^{goyet da zvæl}
Mes cant impudic a velfet ^{Lundic}
Qent eur Mezier convertisset . ^{da zore gyanet}

Ar Vesventi zo eur sourcen ^{vunnen}
Eus a galz viçou disordren ; ^{teizore}
Lenn a rear scrifet var-e dal
E zeo eur pec'het capital ,
Dishenor ar Religion ,

meuz d'as religion Dreis **I**

A galz tud ar berdition,
Ar vuntrerez hac ar revin :
Chetu perac Sant Augustin
En deveus guechal lavaret
Eo ar Vesventi milliguet
Ar brassa eus an oll grimou
A gommetter er parressiou ;
Ebrietas est omnium
Majus flagitiorum.

Gouscoude netra communnoch,

Hirio an deiz netra stancoc'h,

Rac ne veler var an douar

Dre oll partout dre ma' zeard

Nemet lounquerrien distrounqet

Ha Mezierezet divezet.

Na vez eured ebet er vro

Na vez enhi calz tud mezo ,

Hac ar foar hac ar marc'had

A echuer dre eur c'hofad.

Ne vez qet memes eur pardon

Nac eur gouel a zevotion

Na vent oll bremâ profanet

- Gant ar Vezierrien debordet.

Mes , siouas ! ar pez zo goassa

Hac am desol ive muya ,

Eo guelet n'ous pet an hini

Dre'r blijadur seit da vesvi .

O tont d'en em renta envel

o tonez da veza , gant mez

hewel ourz a loenot gavez

Och an anevalet cruel !

Penaus eta , tud malheurus !

Penaus , Mezierezet flérius !

N'ellor biqen disc'hrienna

Eus ho toues an habitud-mâ !!!

Penaus ! biqen na gundufet

Eur vuez sobr , fur ha reglet !

Mes , assamblet amâ hirio , dasennat

Deoc'h oll souden me zisquezo breuric

(Da viana m'am selaouit)

Ar monstr barbar a adorit ;

Ha ma n'ho convertissan qet

Eus hoc'h habitud milliguet , austuric fall

E c'hanavesot dre avançz

Ar malheur hac an dismegançz dezerit

A deanit var ho famillou

Dre ar viçz eus ho tebauchou , tech

Ha ne vezot qet souezet

Pa o guetot oll erruet . chowivred

Nac y zo trist ha pernicius

D'al lounquerennet malheurus ! ned

Rac certen ar malheur brassa

Evit an den var ar bed-mâ

Eo dont d'en em abandoni

D'an habitud a vesventi ; austuric fall

Rac ar viçz-se en discaro

A zeiz da zeiz bete'r maro

Da eun abim a zisursiou , isolant

A valeur hac a bec'hejou ;
 -A rann-galon hac a vizer ,
 A chagrin hac a zisesper. *anfren*
 -Malheurus vo en e zanvez ,
 En e lheñor , en e vuez ,
 Hac en e yec'het goude se ,
 En e silvidiguez ive ;
 Rac peuruya ar vesventi ,
 -P'en em ro'n den da vad dezi ,
 A ra e valheur er bed-mâ
 Hac er bed all er memes tra :
 Rentet eta eur veich Mezier ,
 Chetu én ato er vizer .

Q E N T A P O E N T .

Evit commançz , me a lavar
 Eo malheurus var an douar
 An den a deu da gontacti
 -An habitud d'en em vesvi :
 -An tech-se eur veich qemeret ,
 Ral bras , siouas ! a vez torret ,
 Ha dont a ra e bêr amzer
 D'ober oll malheur ar Mezier .

Peb den ar madou temporel *en ar lu*
 Gant rôson pretanti a hell
 a hell vit grant fons da garet

-Guedal buez , prosperite ^{ha levenez},
 Yec'het ha renom vad ive ; ^{hans}
 Mes ar vesventi millignet ,
 Envel oc'h eul laer affontet , ^{Diverz}
 A deu souden d'en depouilla ^{de la force} ha
 Eus an oll avantachou-mâ.

Dissipa'ra e oll vadou ^{despris par}
 Oc'h en treina d'an debauchou ;
 Discar a ra e oll renom ^{Vint vud}
 O tua e reputation , ^{enem d'au ne hau met}
 Hac abregi'ra e vuez ^{Diverz}
 Oc'h en taul er fallagries :
 Chetu an oll avantachou
 A ro tizan an tavargniou , ^{doaren}
 Hac an tri effet ordinal ^{sur}
 Eus ar vesventi criminal.

Qenta effet ar vesventi ^{obey}
 Eo revina qement hini ,
 Poulset dre aliou' Satan ,
 En tavargniou a glasq tizan.

Pell-amzer zo , auditoret , ^{a Billancur}
 Doue en deveus lavaret
 -Penaus ar Mezier renseudic
 Ne vezó qet pell pinvidic ;
 Rac an debauchou hac ar güia
 Prest ha prest a ray e révin :
 -Calz exemplou hor beus memes ^{de l'Amour}
 A guement-mâ en hor parres.

- Al lounqesen a supposan *aze n*
- Pe ezommec , pe vondian : *pe n ha mado*
 Mar bez paour pa gommanço ,
 E vo paouroe'h pa échuo ;
 Caer ho pe rei madou dezàn ,
 Netra ne resisto outân . *ne hails et tourm*
 Rei aour , arc'hant da eur Mezier
- A zo taul dour en eur c'hrouer ,
 Eur sac'h difonçz fallout carga ,
 Poan inutit da nebeuta . *didavez*
 Dre'r prennest en ty c'hui fourro ,
 Hac én dre an nôr a daulo ;
 Rimplija'rai en eun instant *displyna*
 Eus e zerves , an oll arc'hant , *uic qewntol*
- Ha gounidiguez ar sizun
 A vezò lounget oll d'al lun ,
- Ha davantach , mar bez gallet *insperduz*
- En ty bras fourra eur piget.
 - Ac'hanta ! néo qet er c'his-se ,
 Doug e vorzol , eo , a res-te ?
- Ha te , pautr ar minaouedou ? *lorguement*
 Ha te , bresser ar paveou ?
 Ha te ive , den disouten ?
- Ha c'houi dre oll , micherouriea ?
 Néo qet ounnes eo ho custum
- Peb deiz qenta eus ar sizun ?
 Ne velomp-ni qet alies
 Eur seurt disurz en hor parres ?

- Na petra erru ac'hano ?
 Auditoret , c'hui lavaro ?
 C'hoarvesout a ra malheuriou ,
 Nec'hamantchou ha chagrinou. *arthensiac*
- Na petra helle c'hoarvout qen ?
 Ouzoc'h amâ me a c'houlen ,
 -Al lounqer , goude ober re ,
 A rai nebeutoc'h goude se :
 -Goude ober eur re gorfad ,
 E fritt mizer , e za goustad ;
 En eun deves' lounq e sizun ,
 -Eiz déz goude a ranc yun .
 Mes , siouas ! ar pes zo goassa ,
 Eo greg ha famill an den-mâ , *bagado*
 Ha qement a zo var e dro
 Treina poau ha naoun a ranco ;
 -Gant ar riou oll e crenint ,
 -Gant an astud e tisec'hint ,
 Ha ranna a rai o c'halonou *liger* ,
 Dindan poues o affliction. *ho oll leantou*
 Chetu aze sert ar Mezier
 Paour , en eur gommanç e vicher .
 -Mar-deo pividic pe'n e aes ,
 E stat zo qen dign a druez !
 Rac o c'heulia ar vesventi ,
 Netra pell ne hell prosperi :
 Contchou renget en tavargniou *in libere*
 Da zec a gaçz prest ar c'hantchou ;

Ha var guement-mâ , ma carrep ,
 Me roffe deoc'h meur a breuven .
 Mes an experianç consultit ,
 C'hi etrezoc'h , tud pividie ;
 Piou a velit o prosperi ?
 Ar Vezierrien touet int-y ?
 Salocras , rac ar seurt tud-se
 Ne ouzont nemet bernia dle ;
 E lec'h oza , oll e frêzont ;
 E lêc'h destum , e fouillezont ;
 Ha pell dioc'h prena leveou ,
 E verzont re o familliou .

Comparachit ty eur Mezier
 Oc'h ar pez ma'voa en amzer
 E dad fur hac e vam reglet ,
 Hac en em gavot estouet .
 E plaçz ar goüer er prennestou ,
 Plouz zo bremâ a dorchadou ;
 Ar meubl caer a zo guërzet
 Hac ar pris anezo lounget ;
 Ar marc'h , decor ar marchossi ,
 Zo qignet en hostaleri ;
 Bioc'h ha danyad , yar hac eujen ,
 Tout int efet gant an draesen ;
 Tranch , ear , alar , mar ha palou ,
 Oll int teuzet en tavargniou ;
 An dillat , mèmes bete'n toc ,
 Zo tremenet dre e c'houzec .

Da gommançz en devoa leve,
-Ha bremâ eo sammet a zle ;
Neus netra gantân evel qent ,
An diaoul zo e placz ar Sænt.

Mes , va farrisionis quer ,
Evit anaout mat ar Mezier ,
Roit dezân guella tiegues
A velit ebars er barres ,
Da c'houzont pegueit e padou
-Oc'h al lounquesen divalo !
Me zo sur pa'zayo hirra ,
Ne day qet tri marc'had nao blos.

Er guelet a rafac'h souden
O tissippa hac o tisqen ,
-En e zaouarn o tisvanti ,
O nijal d'an hostaleri.
-Gûir eo un nebeudie amzer
E velfac'h neuze ar Mezier
-O c'hoari manific e roll ,
Qen hac er pare , ba qen oç'h taul ;
Ar voul en e zorn a zalc'ho ,
Ha brao eur pennad e ruillio ;
Biscoas ne voe guelet e bar
Tro var dro var e veg douar ;
Hep discontinui da brena ,
Da drasica , pe da verza ,
-E redo an oll marc'hajou ,
Ha dreist peb tra dre ar foarieuv.

Caout a rayo calz sonsortet, *Kersantet*
Hac heb douetançz commerezet,
-Ha tout gantàn ar cholori
À vezo en hostaleri.
Hoguen, daoust pegueit e padò
-Ar pot dispar var e veno?
Qeit sur bac arc'chant ar re all,
Qeit-se just, nonpas en tu all.
Guelit c'hoas un nebeut amzer,
Oh ! pebes chenchawant caer !
Al lounqeseu collet e dàn
À velot souden e noas gloan;
Prest ha prest e vezo clèvet
Penaus a zle e zeo sammet :
-Scoden amâ, scoden aont,
Dle en ty-mâ, dle en enhont,
Eur billet roet da Jacquette,
Ha pêvar da Philipetta ;
Eur c'hreançour impatient
Da rattrapoùt lod e arc'chant,
À sao e benn, a den araoe,
Arrêt a lacaer var ar pot ;
Chetu ar pillach en e dy,
Al lounquer couezet var e fri ;
Fouettet en deus pis e drantel,
Eat eo e stat gant an avel ;
Chetu én laqeat en noas,
Ha foseet marteze, siouas !

D'asten an dorn a dy da dy,
 Da c'houlen bara da zebri !
 Ennes eo ar fin ordinal
 Eustao oll lounqesennet fall,
 Ha commun eo an exemplou ^{meket d'Ille et Vilaine}
 A guement-mâ dre'r parressiou.
 Ia , guell eo ganén guelet
 An tân-goal en un ty croquet,
 Eguet guelet eul lounquesen
 Placet enhàn da gabiten.
 An tân evit güir en dévo ,
 Mes an dræsen lous en teuzo.
 Mar teu an tân d'en devori ,
 Ar Mezier er e'hass bete'l ly ,
 Hac an avantaich a gavàn ^{bagan ou gavand}
 A zo tout e faveur an tân ;
 Rac varlerc'h an tâu peuryuy
 E chom ludu da viana ,
 Ar found , ar vein hac an houarn ;
 Mes , Mezier , etre da zaouarn ,
 Dir hac houarn , found ha mein
 A vez teuzet en eur c'hoarziu .
 Te'voar ar secret da deuzi
 Qement zo en hostaleri.
 An tân-goal en un ty croquet ,
 An droug a rayo hep pec'het ,
 Rac un hevelep accident
 Ne outraich qet an Oll-Buissant ;

Mes ar Mezier a zispigno,
 A frippo tout hac er loucco,
 Ha ne baoueso' da bec'hi
 Qen a vo erru gant al ly.
 Nemet o tremen ar flamhou
 Ne droublont peoc'h ar famillou;
 En eur moment e tevorint *pennad anez*
 Ar madou hac o fulluc'hint,
 Hac ar moment-se tremenet,
 Chetu an alarm achuet : *oprouval*
 Eur malheur eo da ajouti *unant*
 Da galz c'hoas a valleuriou cri,
 Ha ne ouzor petra rafet.
 Mes dioc'h ar Mezier milliguet
 Ne viot qet quer buan pare,
 Rac qeit ha ma pad e vue
 Abominabl ha criminel,
 E pado gant'an ar brezel.
 En a rayo oil an drougou,
 Ha c'hui, espernit ho comzou ;
 N'oc'h eus netra da lavaret
 D'an dræsen, *pa* vezo tommet : *Despouill*
 En ly neuze tout e trouble,
 Hac an oll a bersecuto.
 Evit recompançz peurvuya
 Na esperit qen digantâ
 Nemet insult ha goaperes,
 Taulliou teod ha muntreres ;

Ar vas d'al laz a zoug ato,
 Ha massacri oll a rayo
 Ma na vezit eus e avis,
 C'hui, pried ha bugale gueiz.
 Pebes disurs ! pebes truez !
 Pebes malheur d'eun tieguez !
 Pebes tourmant, pebes anqen
 Zo e tyes ar Vezierrien !!!
 Pebes dallentez criminal
 Caret eur viçz zo quer fatal !
 Caus a guement a valeuriou
 Hac a chagrin er familliou !!
 Penaus, træsennet, lounquerrien,
 Penaus, ne gomprenot biqen
 E frippit en hostaleri
 Hoc'h oll madou dre'r vesventi ?
 Penaus, ne gomprenot james
 E laqit famill ha graguez
 Var an teil, ha memes en noas,
 Crissa tra a veljor biscoas !
 O goad innocent a sunit
 Gant al liqueuriou a esit ;
 Ar goad pur eus o c'halonou
 Eo, a rusch bord ho muzellou.
 Da betra e servich dezo
 Choezi nôs-deiz betec ar bleo,
 O labourat d'en em souten,
 D'an ampoent ma teues te, tñæsen,

Te , tad cruel ha detestabl ,
 Dre un tech qen abominabl ,
 D'o c'hass bemdez da fonçz an sour
 O tevori pris o labour ?

Mes greomp silançz var ar poent-mâ ,
 Rac bez'e zeo an distera
 Deus effejou ar vesventi
 Hac a froues an hostaleri.

Un effet all perniciussoch ,
 Mezierrien , eo dre ma ra deoc'h
 Coll crenn ho reputation ,
 Peb santimant ha peb renom.

Al lounquerrien , peur-liessa ,
 En em gred tud eus ar c'haera ,
 -Tud a speret ha tud güiziec ,
 -Ha casimant oll-galloudec.

Nep a gleffe'n hostaleri
 -An dræsen en em bompadri
 Demeus e oll actionou ,
 E droyou fin , e zantimantchou ,
 A lavarfe sur ne ve den
 A guer bras consecançz hac 'en ,
 Ha ne'zeus qet güelet e bar
 Pell-amzer zo var an douar.

En em drompla'res , rac-se tao ;
 Va selaou , lounquer divalo :
 -Adalec ma zout deut Mezier ,
 Da sqiant bras e bêr amzer

Ha da henor a c'heus collet,
Gant ar güin e c'heus-y efet.

Auditoret , mar desirit

Anaout ar Mezier , permetit
-Ma rìn deoc'h ar poltret fidel
Eus e bersonnaich disantel ;
Mes o tespeign deoc'h ar Mezier ,
-Na c'herit qst eur poltret caer ;
Calz traou brao er found neus qet
-Divar e benn da lavaret.

Ar Mezier zo , peur-liessa ,
Un den an insupportapla ,
-Un dieveset , un affronter ;
Fiziout enhàn netra n'eller ,
Heb nac henor , na santimant ,
An dout an dud dre gonsecant ;
N'en deus nac estim , na renom ,
Dreist peb mez ha confusion ,
Pa velo sqeud an eaudevi ,
-Ne rayo forçz , piou da henti ,
Gant piou en em associa
Ha mont d'an davargn da lounca .
Ober a rai mignouniaich
Gant peb seurt tud fall ha volaich ,
An toullou ar re issawa
-A frecanto heb tam rusia ,
Ha guelet e vo ec'h ober
-Qement action divoder

A zo propr d'en dishenor
-En oll d'an oll d'en degradi.

-Da ziaseza an taillou ,
Mar en lacait er parressiou ,
-Diveset ha digoustiancz ,
Ne gonsulto tam ar valançz ;
Discarg ho po , ma er c'harguit ,
Rac ne glasq nemet e brofit ,
Hac evit pris ur picherad
E c'hounesot eur varillac.

Mes ar barres farçz ar c'hanton ,
Partout e ray e histrion ;
Control d'ar bolissonet all ,
Pere d'ober o zroyou fall
Ordinal a glasq ar c'hoignou
En abri eus an oll sellou ;
Al lounquesen e façz an oll
-A c'hoari e botr hac e roll .
Mar deus eur foar pe un eured ,
Eur Sul , eur Gouel solemniset ,
Eno just en em zistingo
Ha boufoun an oll e vezzo.
Ne gredan qet memes rima
Qement a lavar hac a ra ,
Rac o sonjal hebgen enhê ,
Auditoret , piou ne ruschfe ?
Na gontit qet var e gomzou ,
Na mui var e bromessaou :

Dioc'h ar mintin e c'her a ro ,
 Dioc'h an nôs en dislavaro :
 Hirio e rayo eur marc'had ,
 Varc'hoas en torro mintin mad ;
 Eur grevidi fisshit er pot
 Hac abred en hanavesot ;
 Dirac ar voutaill en ho ty .
 Hac iveau en hostaleri
 E rayo deoc'h promessaou
 Ar re gaera , a bep seurt liou ;
 Eur mignon eo ar fidela ,
 Habil meurbet , na petra-ta ;
 Al lezennou eus ar chican
 A ane oll guitibunan ;
 Mes fiziout en eur seurt bourc'his ,
 Va c'bredit , a zo eur sottis ;
 Rac dioc'h-tu ma vo troet ho qein ,
 Ho quérzo evit ul lom güin :
 Evel Judas ho trahisso ,
 Rac un traitour detestapl eo.
 Da veza potr , da veza mest
 Eo incapapl , me en attest.
 Petra reot-hu gant eur mezier ?
 Petra elfac'h-hu da ober ?
 P'o po mui ezom dioutân ,
 Bezit sur e viot heptân ,
 Hac e gaout mar desirit
 Ar c'hos lavargniou bisitit

-Hac er bourgou hac er c'hærriou ,
 Ha goude ze er bouillennou .
 P'en deus ezom eus e speret ,
 -E vez peurvuya dianqet ,
 Ha pa dle en em zisqeuz den ,
 -E vez aneval , netra qen .
 -Mar er c'hassit eun tu benac ,
 Bezit sur penaus e gorfad
 Da zont d'ar guær en ampecho ,
 -Rac var an hent e fazio ;
 Na mar-dit ássambles gantâ ,
 Pebes histor e ve oumâ !
 -Brava jeu ! diolla obaden !!!
 Var ho Jerc'h evel un eugen
 E rancot dre oll en treina ,
 Hac ersin gant truez ountâ ,
 Lacat er gorren a gostez ,
 Poursiou'n hent hep compagnuez ,
 -Ha goude ze , pa deuot en dro ,
 Ho compagnon c'hui a gavo
 Adare er memes etat :
 -Güella den ! surra camarad !!
 Chetu aze , admirit-én ,
 Poltret güirion al lounquesen .
 Na peseurt reputation ,
 Peseurt estim , peseurt renom
 -En do'n hevelep artisan ?
 Casseat e vo gant peb-unan .

Mar-deo domestiq ar mezier,
 Partout rebutet er gueler ;
 Abalamour d'an dishenor ,
 Den ne royo dezàn digor ;
 Evel louzou oc'h an derzien
 E vo qemeret , netra qen ,
 Ha qentoc'h dre necessite
 Assur eguet dre garante.
 -Mar-deo ive c'hoas den yaouanq ,
 Adieu d'e fortun hardimant
 A ell souden da lavaret ;
 -Rac , peseurt merc'h sur a speret
 -A roi e born da eul lounquer
 Anavezet evit mezier ?
 -Pe ma er gra , certenamant
 Ar plac'hic-se e deveus c'hoant
 Da gommançz e ifern er bed
 Daou zeves goude e eured.
 -Mar-dê iver eur penn a dy
 A zo sujet d'ar vesventi ,
 En em zishenor e-unan ,
 Hac e dud assambles gantân.
 Ober a rayo farçz an oll ,
 -A bep seurt guinaouadou drol
 Anezàn a vo lavaret ,
 Dre oll e vo grêt e boltret :
 -Fouet e drantel hac eul lounquer
 -Un dræsen fall hac eul liper ,

Un tapager, eul lassoueden,
 Potr ar voutaill hac ar veren;
 Chetu lod eus an titrou brao
 A roer d'ar mezier atao.

Mes ar pez a zo deplorabl,
 Bugale baour ar mizerabl,
 Allas ! a vezо victimou
 Eus e vicz hac e zebauchou !
 Ha c'hoant a zo d'o fortunia ?
 Lavaret e vo da guenta :
 An den-ze a zo mab e dad,
 Eveltan e car' chopinad :
 An tad a gav mad e vanne,
 Hac ar mab er c'haro ive ;
 An tad a zo eul lounqesen ,
 Un dræsen bur , eur sperbillien ;
 Ar mab ive gant an amzer
 A velot a vezо mezier :
 Chetu petra'vez lavaret
 Dioc'h mibien all lounqesennet.
 Caer e vezо d'ar c'hrouadur
 Beza reglet mad ha fur ,
 Vicz e dad en rento suspect
 Da zaoulagad an dud honest :
 Hanavezet eo vicz an tad ,
 Collet en deus fortun ar mab ;
 A boan memès ec'h ell flaich ,
 Ma e zauler en e visaich.

Mar-deo ar mezier eur chef bras,
 Mear, pe ajant, pebes goas !
 -Ne vezo guelet var e dro
 Nemet chicanerrien ar vro,
 Troidellerrien, filoutet,
 -Trufflennou ha laqipotet :
 Paul-Piltout ha Pêr ar C'hannou,
 Yan Carnaïch ha Jacq an Dançou ;
 Gab Forban ha Marc Hugunot
 Oc'h e heul partout a velot.
 -Henorapla compagnuez !
 -Coanta lapousset assambles !
 Hac eur vaoues eo zo mezo ?
 -C'hoas, christenien, eur pez brao !
 Eur vaoues, eur c'hreg mezieres,
 -Deplorapla loudouries !
 -Rac ma ne qet propr guelet cou
 Gant e gofad er bouilliennou,
 Pebes mez guelet Yvona
 Gant e zreus-gorfad o ruilla !
 Eur veich c'hoas pebes horrol
 Guelet Baptist hac Anathol
 -O vont a gleiz hac a zeo
 -Evel daou eugen oc'h ar yeo,
 Hac erfin e creiz ar poullou,
 -O ruillia evel porc'hellou !
 -Mes eur c'hreg meo'stoc e c'hroc'hen !
 Oh vileni ! oh disqempen !

-Eur vaoues tec'het d'e banne ?

Tavomp crenn an infamite !

Rac biscoas an Tadou Santel ,

Na Jesus-Christ en Aviel ,

Ne rojont deomp a dermeniou

Da rima e vileniou.

. Petra goude da lavaret

Eus a grim hac eus a bec'het

Ministr un Doue teir gueich santel ,

Sqüer ha doctor ar bobl fidel ?

-Da Jesus pebes calonad .

Rei e gorf sacr hac e c'hood

Da eur Ministr quer criminal

Hac an treitour Judas gueichal !!

-Mes , va fluen , paouez amâ ,

-Rac va c'halon a venn ranna....

Deus pez stat benac eo an den

A gar ar güin , a dra certen

Eo dre avançz dishenoret

Ha gant an dud fur disprijet.

Inutilamant a hend all

En deus an oll talantchou ral :

Adalec ma zeo deut mezier ,

Adieu dezo tout en antier ;

Rac james c'hoas ar vesventi

Ne deus manget d'o degradi,

Al lounquer infam marteze

Ganet a dud a galite ,

A zo bet er scoliou savant
 Hac instruet parfetamant ;
 -Mes paqet tech ar vesventi ,
 Déut pillier an hostaleri ,
 -An den-ze a goues da netra ,
 Ne barlanter mui anezâ
 Nemet seulamant d'en dispen
 -Ha d'en trêti a billioten ,
 -Coll a ra henor ha danvez ,
 Eurus ma na goll e vuez .

Mes péseurt a zo communnoc'h ,
 (Respontit , m'er goulen ouzoc'h)
 Eguet guëlet ar vezierrien
 O vervel aroc o zermen ?

Ar proverb sclær deomb a lavar
 Penaus gourmandis a ziscar
 Mui a dud eguet ar c'bleze :
 Chetu perac speret Doue
 A lavar e bêr termeniou
 Penaus calz dre o debauchou
 A acquisit eur maro pront ;
Propter crapulam multi obierunt.

Nan , nan , lounqesen disantel ,
 Pell sur ne elli qet erzel ;
 Rac , auditoret , penaus pad
 Oc'h qenlies a re gorfad ,
 Oc'h qenlies a stocaden ,
 Ha dreist pep tra a nosves yenu ?

Eul lam amâ , eul lam aont ,
 -Eur ^{ch} gann amâ , eur gann duont
 Er lacai e stat a varo
 Ha var an dachen en dalc'ho .
 Enos o veza re zammet ,
 Var eur bern erch en deus loget
 E toul ar c'haë pe er fosiou ,
 P'e creiz ar pri er bouilliennou ;
 Gant ar riou mil gueich sclacet ,
 E oll vemprou a zo sonnet .
 Varc'hoas ive' creiz al loaguen
 -E vo cavet a stoc croc'hen ,
 A bri hac a fanq , pe a c'hood ,
 Palastrennet pen , qil ha troad ;
 Qement e zeo desiguret ,
 Ma ve gant an oll qemeret
 -Evit un teus , pe ur spontal ,
 Pe memes evit aneval ,
 Qentoc'h eguet evit un den ,
 Ha dreist oll eguet ur c'christen .
 -Brava tra ! caera taul-lagad !!
 Guelet neuze va c'hamarad
 -En em chacha eus ar vouillien
 -Hac o hija e gailliaren .
 -An hent dezàn a zo re stris ,
 Daou bas aroc , tri var ar c'his ,
 Eus eur c'hoste' za d'eguile ,
 Coulz ha pa na velfe banne ;

D'ar vezen e ro un heurtad ,
-D'ar c'haë pe d'ar c'hleus un tourtad ,
Hac a la fin e ruill er fos
En eur vriata e vam gos.
Capapla den ! guella ozac'h ! !
Nopla pried , vantrebistac'h ! ! !
Ceit dre vertus an dour rësin
Va c'homper eno var e guin ,
O clêm evel eur possedet ,
Pe Satan en dour béniguet.

Hoguen , ouzoc'h me a c'houlen
(Respondit eta , christenien)
-Hac én a dle beza yac'hus
-Eun trein buez quer vicius ?
Tout gouscoude oc'h eus guelet
Qement a zo amâ merget ;
Rac , siouas ! ar seurt exemplou
Ne dint qet ral er parressiou.
Plijet gant Doue ne ve nicun
En ho toues nac en ho commun
Hac en deve biscoas ròet
-Eur seurt arvest d'e vignonet !

Penaus e fell deoc'h e padfe
Eur c'horf trêtet er fêçon-se ?
Nan , biqen ne ello erzel ,
-Ha pa ve dir ne-dai qet pell ;
Ha guelet a reomp alies
E creiz e vrud ar mezier qès

O verzel mizerablamant,
 Accablet eus a vil dourmant
 Emâ dre languis a velit
 O tisec'ha divar e dreit,
 O crena var e izili
 Gant ar güin hac an audevi.
 Ennont a veler distronget,
 -Broustet oll hac estropiet
 O vont a drein varzu ar bez,
 E creiz ar fleur eus e vuez,
 Victim trist e zebauchou
 Ha merzer eus e gôfadou.

Ia , va c'hredit , rac sur eo ,
 Meziereset lous , c'hui em c'hleo ,
 Ar re' deu d'en em anroli
 E breuries ar vesventi
 -A ziverra o bloavesiou
 Dre an nerz eus al liqueuriou ;
 Rac-se , mezier , n'en em sis qet
 Var da gomplexion calet ,
 Var da demperamant nerzus ,
 Na var da yec'het galloudus :
 Mar deuers d'en em abandoni
 D'an debauch ha d'ar vesventi ,
 -Adieu d'ach henor , d'a'fanves ,
 Adieu did , adieu d'a' puez...
 Rac pa eestimi bianna
 Ea em veli o tisec'ha

Da yec'het cre prest a golli ,
 Da complexion a ruini ,
 Da demperamant a soublo ,
 Hac ar maro a erruo ;
 Diou veich coupapl ha maleurus
 En da zebauchou scandalus ,
 Dre ma'c'habrejes da vuez
 Dre ar viçz eus da volontez .

Chetu aze trede effet

Ar vesventi erminennet :
 E creiz o nerz , e creiz o brud
 D'ar vêred , e tigaçz an dud .

Goude qementse , mezierrien ,
 Redit d'an davargn a vanden ;
 Vantit huel ho tebauchou ,
 Grit pompad eus ho côfadou ,
 Goalc'h ho calon en em vesvit ,
 Mes biqen n'ancounac'hait
 E zit die ho habitud fall
 A benn aer varzu'n hospital ;
 E rit , dre ho mesventiou ,
 Ruin ha malheur ho famillou ,
 E tistrujit pront ho yec'het ,
 Hac e toullit ho pez abret .
 Chetu aze an oll madou
 A brocur deoc'h ho tebauchou
 Ho tissammi , ho revina ,
 Hac a la fin ho tistruja .

Ah ! mesventi, viçz scandalus !!
 Te zo fatal, pernicius !!!

Penaus, ne-dout-te qet contant,
 Ne gaves-te qet suffisant
 Coll ene ar mezier touet,
 Goude e varo erruet,
 C'hoas e vadou ma tistrojes
 Gant e henor hac e vuez ?

Ho parados, ô va Doue !
 A dra sur ne goust qet qeit-se
 D'ho servicherrien generus,
 Na d'ho merzerrien gloriis.

Ah ! mezier paour, antre eta
 Ennout da-unan ar veich-mâ ,
 A visiqen chench a vuez ,
 Ha sorti eus da zallentez.
 Rac da zebauchou milliguet ,
 Evel ma e c'heus er guelet ,
 A ra er bed-mâ da valheur ;
 Mes ar pez zo goassa , mezieur ,
 Eo, ma's privo eus ar gloar
 A brocur Doue d'an nep er c'har
 En e varados dudius
 Etoues ar sperejou eurus.



E I L P O E N T.

Coll an êevou hac e oll gloar
 -En eur guimiada dioc'h an douar,
 Disqen e fond an abimou
 Evit souffr peb seurt tourmantchou
 Chetu ar malheur preparet
 Gant justic un Doue d'ar pec'het,
 -Ha da beleac'h ho cunduo
 Casi sur goude ho maro
 An habitud a vesventi
 -Ma na dorrit qet anezi.
 Seriusamant sonch-ta, mezier,
 E redes da dy Lucifer
 Pa'zes d'an hostaleriou
 D'en em livra d'an debauchou ;
 Rac deoc'h oll, me brouvo bremâ,
 (Ha selaouit mat an dra-mâ,)
 E zeo ar vesventi eur viçz
 Opposet da bep honestis,
 Dreisy enhàn pec'het bras,
 (Evel a lavar Sant Thomas,)
 -E deveus avoalc'h a vilim
 D'hor precipita en abim,
 Avoalc'h a valiçz d'ho priva

Eus a c'hraçz Doue er bed-mâ ,
 Ar barados deoc'h da serri ,
 Hac an ifern da zigueri.

Balamour da ze ar Scritur ,
 Oll credit-y , mar-doc'h-u fur ,
 A ro gant indignation
 D'ar viçz-mâ reprobation ,
 Hac e deus atao e gountet
 E niver eus ar sez pec'het ,
 Ma'meus sonch mad , hanvet gueichal
 Pec'hejou bras ha capital.

Isai en deus declamet
 Oc'h ar vesventi milliguet
 Gant calz a nerz hac a gouraich ,
 Selaouit , chetu eur passaich
 Eus e c'hourdrousou immortel ,
 Dictet gant ar Speret-Santel :
 « Malheur d'an oll lounqesennet
 » Ha da guement a sao abret
 » Bete'n nôs d'en em abreuvit
 » E feunteun an hostaleri !
 » Malheur d'ar mezier arroutet ,
 » A bini ar penn zo calet
 » Ha galloudus da gorfata
 » Epad an derives hep coeza .
 » Evel ma'zeus hiniennou
 » Re stanc , siouas , er parressiou !!
 Piou a zoùeto goude ze

Ne ve marvel ar pec'het-se ,
 P'en deus Doue , dre e Broset ,
 Q'en nerzus outan déclamet ?
 -Ja , træsen , ar vesventi ,
 Merc'h infam an hostaleri ,
 Dirac Doue da gondaono
 Hac en tân da brecipito ;
 Rac eus ar viçz-se ralamant
 E tistroer parfetamant ;
 Ha gouscoude p'lec'h erruout ,
 Peseurt termen da esperout
 Nemet tourmantchou éternel
 Goude eur vuez qer disantel ,
 -Q'en disordren , qer vicius ,
 Qer coupapl ha qer scandalus !

-Divoal dreist oll da excusi
 Ar pec'het eus da vesventi ,
 -Var an digares ne res qet
 -Gaou dâ famill na dâ pried ,
 Dre ne vezes mezo james
 Nemet bep bloa da Volarges .
 Pe autramant d'an eureujou ,
 -Pa vez gratis ar c'hofadou ;
 Pe autramant abalamour
 Ar rest ar bloa e c'hefes dour ;
 -Pe dre ne vezes qet goal glan ,
 -Ha n'e pez na disput na cann ,
 -Dre ne losques a leiz guinou

-Ar mallos hac ar sacreou ;
 Dre ma'zes evel un azen
 -D'ar guær eün dre ar venojen ;
 Pe' balamour da vignonet
 D'an davargn o deus da dreinet ;
 -P'evit mil rëson all dister
 Invantet oll gant ar mezier
 Da gusat e habitud fall
 Oc'h e Bastor en tribunal :
 -Rac ganes ha pë n'errufe
 Nicun an tout eus an traouse ,
 Mar-dout mezo e c'hoffances
 Da Zoue , hac e commettes
 Eur pec'het grevus ha marvel
 Ha heneb e lezen santel ;
 -Rac guézit ervad , mezierrien ,
 Gant ar juz eus ar vinien
 Ha pa na veac'h bet trahisset ,
 C'hui a entent , meziereset ,
 Nemet eur veich en ho puez ,
 Ha pa na sacrefac'h james ,
 -Ha pa na rafac'h gaou oc'h den ,
 Nac injur ebet da gristen ,
 -Hep noasout na d'ho ty ech'et
 Na d'ho familliou qen neubet ,
 Eo eur pec'het bras evidoc'h
 En em renta henvel oc'h moc'h ,
 O eoll perlezen ho rëson

Ar breciuissa donezon
 A roas Doue dre garante
 Da Adam ha d'e vugale :
 Dre an debauch en em lacat
 En eur fèçon hac en eur stat
 Ma n'eller mui en em zouguen ,
 En em chacha eus ar vouillien ,
 En em zivoal , en em dreina ,
 Na bete'r guær en em renta ,
 A zo eur c'hrim hac eur pec'het
 Grevus hac effroyapl meurbet ,

Na repligit qet , mezierrien ,
 Ne gollit james ho carten ,
 Ha seulvoas ma ho po efet
 E vezit seulamant tommet ;
 Rac hep coll ho rēson memes ,
 Hac amâ tout taulit eves ,
 Notablamant mar e zroublit ,
 Eur pec'het bras a gommettit ;
 Ha seul ma'zoc'h calet a benn
 Ha gallooudus bras da souten
 Calz a vīn hep dont da vada ,
 Oc'h eus ive leac'h da grenâ ;
 Rac justamant d'eur seurt poltret
 Isai malheur a bromet ,
 Abalamour d'an disprijançz
 O deus evit an demperâncz :
 Rac outragi' reont o C'hrouer ,

Ha varnê' tennont e goler.

Mes ar vesventi malheurus,
-Ouspen ma'zeo pech'et grevus,

Evit consortet ordinal,

E deus atao calz viçou all.

Represanti pere amâ,

A vez eul labour ar vrassa;

-Mes gouscoude, pa'meus amzer

Hirio da instrui ar mezier,

-Me ziscuëzo e bêr gomzou

E transgress oll gou'rehemennou

Ua Douë infinimant sanctel

Dre e habitud criminel.

A eneb ar feiz e pec'ho,

Rac eus a oll e touëto;

Netra eus ar Religion

-Dezân ne seblanto güirion :

-Discredi rai an articlou

Fountet var galz a breuvennou

Solid, ha mèmès sciellet

Gant goad hor Salver benniguet.

Lacait dirac e zaoulagad

Ar varn e traonjen Josaphat,

Ar Barados gant e vonheur,

Hac an Ifern gant e valheur';

Goab ac'hanoëch prest a rayo,

Hac e ridieul ho troyo,

Hit, ewezan, ho' historiou.

Da gonta d'ar vugaligou ;
 Spontaillou int , tout inventet
 Evit trubuilla ar merc'het ;
 Me ne-doun pelloc'h eur buguel
 Da grena rac an Aviel :
 Ha mar fell deoc'h lavaret guer
 Var gomportamant ar mezier ,
 E c'houlenno en eur c'hoarzin
 Evit petra eo grêt ar güin
 Nemet evit beza efet ,
 Ha nonpas beza disprijet.
 Me , emezàn , er c'haf qer mad ,
 - Ma peurlonqfen eur varilliad .

Balamour da ze ar Scritur
 A recommand d'an oll dud fur
 Cassât ar güin hac ar merc'het ,
 Pe autramant e vint collet .

Mes a eneb an esperançz
 E pec'h iveau o coll fiziançz
 Da erruout er Barados
 Goude e varo da repos .

Eus an debauch , allas ! victim ,
 E lavar eo re vrás e grim
 Evit sonjal beza pardonet
 Gant un Doue just ha coleret .
 Chetu eta ar c'heas mezier
 En abim eus an disesper .
 Ma' c'hesper en em savetei

-Héb renoncz crenn d'ar vesventi :
 Chetu én er bresomption ,
 Ha var hent an daonation,

Distruja ra ar garantez
 Dlet d'e Zoue ha d'e hentes.
 Heneb carantez da Grouer ,
 Alies e pec'hes . mezier ,
 Dre ma teues d'en outragi
 E mil fèçon er vesventi :

Ossansi a res da nessa
 Dre'r goal exempl a roes dezâ
 En da dy hac en da barres
 Hac e qement plaçz ma valees
 -Ganes o chacha ar re all
 Da goifata en toulou fall ;
 Hac ar Religion santed ,
 Dre da habitud criminel ,
 E partout a zishenores
 Hac e peb poent a neglijes.

Neglija' res da bedennou
 Hed ar sizun ha d'ar suliou ;
 N'havanavezés Doue ebet
 Nemet da gôf , den debordet :
 An davargn a zo da ilis ,
 Al liqeuriou da sacrificz ,
 Ar voutaillion eo da gleyer ,
 Ha da gorist an tavargnier.

Eus ar Sacramantchou hini

Pelloc'h biqen ne strecanti,
 Pe mar tostaes d'o receo
 Hep chench a vuez , te a gleo ?
 E c'hen em rentes davantaich
 Eur profanatour sacrifaich :
 Chetu ar c'henta gourc'hemen
 Nullet eta gant au dræsen.

A heneb an eil goude se
 Stanc ha stanc e pedo ive ,
 Rac ar mezier peurlissa
 -N'enev , siouas ! qen rosera
 Nemet ar valediction ,
 Ar foultr , an imprecation ,
 Ar mallos hac ar sacreou ,
 Chetu e oll litaniou ;
 Rae eur c'hristen divar ar güin
 A bec'h evel eur sarrasin.
 -Pebes scol ! ô pebes sqüer fall !!
 D'ar familliou pebes scandal !!!

Violi a res an drede
 Eus a c'hourc'hemennou Doue ;
 Rac ar Sulion a brofaues
 Hac ar Goueliou santel ives ,
 Oc'h o zremen en tavargnou ,
 Mezier infam , en debauchou :
 Dre' breferanz en o choasi
 -Memes evit en em vesvi ;
 Ha guelet a rear alies

-Hiniennou' pad an eiz des
 Er güin betec o daoulagad :
 Pebes buez ! terrupla stat !!

Transgressi'res ar hèvare
 -Dre ar boan hac ar goal vue ,
 -Ar chagrin hac ar rann-galon
 -A res , lounqesen ampoëson
 D'as mam , d'as tad , mar bevont c'hoas ,
 -Ha d'as creg miserabl , allas !
 -Qercouls ha d'as pugaligou ,
 Victimou eus da zebauchou.

Examinit mat ar mezier
 O c'herruout mezo er guær ;
 An ty dezàn zo re viàn ,
 -An oll a scrich forçz dirazàn ,
 En e rauc , tout e vugale
 -E creiz un tân-goal a saillfe ;
 Ha goude beza bet privet
 Gant o zad cris ha debauchet
 Eus ar pes a voâ necesser ,
 -Quitibunan'maint e danger
 Da rancout rinça eus an ty
 -Evel o c'henlies a guy ,
 Da loja e cambr ar steret
 Pe e toues an anevalet ,
 En eur c'hraou benac a gostes ,
 En danger da goll o buez .
 Pried miserabl an dræsen ,

-Er Sach eus a greiz ar vouillien
 -C'hoesi a ra n'ouz peguemant
 Oc'h en distreina dre an hent,
 Hac a veach er guær erruet,
 Ractal e vez recompanset:
 Mes pebes recompans, siouas!
 -A dauliou treid, a daulion bas,
 Tauliou teod hac injurion,
 Ha calz maledictionou!
 Pebes croas, ô va Done!
 -Pebes rann-galon d'ar gueis-se.
 Ia, oc'b Satan caout affer
 A garfen qent, oc'h eur mezier.
 Heneb ar bempet gourc'hemen
 E pech'ivez ar vezierrien,
 Dre o c'holer, dre o c'bannou,
 Dre o goal gomportamantchou,
 Ha dre mil ha mil affer fall
 A reont evit an ordinal,
 -End veich savet ar güin d'o sen
 -Hac eat diwar an arouden.
 Ar chuech'het tout a dransgressont
 Dre'r bivardisich a leverout,
 Rac ar vezierrien peurvuya
 Zo libertinet ar goassa,
 A bep seurt lobriciteon
 A sorti stag deus o guinou;
 Clevet a rear en o zoëus

-Eus a bep seurt loudouries,
 -A bep seurt coñzou disordren,
 Qen dangerus hac ar vocen;
 Rac en eneou innoçant
 E c'hélumont en un instant
 Tân infam an impurete:
 Tec'bit eta pell diouté.
 Davantach, mezier milliguet,
 E pec'hes heneb ar sezvet,
 Dre an injustiçou brassa
 A rês evit caout da esa.
 Mar-dout servicher eu un ty,
 Mar guelles, da vestr a laeri;
 -Mar-dout eur penn a diegues,
 Oc'h da famill tor bras a res;
 En tavargniou e verni dle
 Hac e forci da vugale
 -D'o faëa, lounquer diveset,
 -Hac oll goude ma'po teuzet
 -E chapeleou ar bod illio,
 Mar guelles c'hoas te a vez
 Expert var danvez ar re all,
 -Ha dre da droidellou fall
 Mil injustiçz a gommetti
 -Evit qenderc'hel da roulli;
 -Dioc'h an tu ma teuyo ar güin
 Te'n em gavo atao d'ar fin;
 Correttour néo qet ridicul

Ne sell james oc'h ar musul ;
 Mes seuvui a ell da drompla,
 Seul-brassoc'h e vez e joa.

- Discurpul al lounqesennet
 A viol ives an eizvet ;
 Oll bepret o c'haver dispos
 Da ober testeniou faus ;
 - Gant ma paeot dê banneou ,
 E raint gueyer, calomniou ,
 Qement n'int qet eus o c'hostes
 - Da zua ne vanqint james
 Dre ar vilim démeus o zeod
 - Hac e mil fêçon all mar faut.
 - Evel un danvad cailliaret ,
 An dræsen lous ha divezet ,
 Tout ar re all a sclabezo ,
 A frezo hac a zispenno ;
 Rac collet eur veich e renom ,
 N'en deus qen consolation
 Nemet o tiscar ar re all
 Hac eveltân o renta fall.

Heneb an naovet gourc'hemen
 E pec'h ives al lounqesen
 Dre ar villa sonjesonou
 Hac ar c'houpapla desirou
 Excitet enhâ dre ar güin.

A beneb an decvet etfin ,
 O tezirout n'eus fors pe c'his ,

-Coulz a zeo evel a gleiz ,
 -Peadra da ellout terri
 E sec'het en hostaleri.

-Un den techet d'an debauchou
 Zo capapl a bep seurt crimou ;
 Ne respect mui na Gouel na Sul ,
 Netra ne ra dezàn scurpol ;
 Evel en davargn eur banne
 E c'hef peb seurt iniqite :
 Cheju , allas ! e pe fêçon ,
 Auditoret , è teu'r boesson
 Da daul an den en oll viçou
 Hac er falla habitujou.

-Petra goude da lavaret
 Eus a sort al lounqesennet ?
 Penaus ellout mont en hent-se
 Un deiz da Varados Doue ?
 -Calz a leach'h zo da ziscredi ,
 Allas ! ha da zisesperi
 -Eus silvidinez eur seort den ,
 Pa ne ra eur güir binigen .
 O voale'hî dñe eur môr daëlon
 An drouc eus e voal-exemplon ;
 Rac ma ve guelet ar mezier
 O chench buëz gant an anzer ,
 Hac oc'h ober a greiz calon
 Eur güir brezel d'e bassion ,
 -Peguenient bonac a grimou

En deus grêt dre e zebauchou,
 Hor be c'hoas an esperanç.
 En d'o pardon hac indúljanç.
 Eus e habitud vicius
 Hac eus e vuez scandalus
 Digant un Doue leun a zouçder
 Hac a druez, oc'h ar pec'her/
 Mes commandacet d'en em rei
 A fêçon vat d'ar vesventi,
 P'eur er guelor convertisset
 Eus e dech côs ha milliguet?
 Alias! sur marteze james!
 -E barea ne-deo qet aes;
 -Faë a ra var ar remejou *feu*
 Mad da zec'ha e c'houliou,
 Ha d'ar c'hraçz e serr e galon
 Atao leun a bresomption.

M'ho qemer amâ, mezierrien,
 C'hui oc'h-unan da varnerrien;
 Pet lounquer oc'h eus-hu guelet
 O renonç d'o zech er yec'het?
 Hirio gant nerz e protestint
 Penaus mezo mui ne vezint.
 Oh! va Doue, caera affer!
 Convertisset crenn ar mezier!
 Mes pegueit e velo an dud
 En o zoues eur seurt burzud?
 Quedomp c'hoas un occasion

Hac adieu d'e gönüersion...

Ha n'oc'h eus-hu qet oll clévet
 -Meur a veich epad eur retret
 Furedou an hostaleri
 A greiz calon o prometti
 Ne vijent mui biqen mezo,
 -E vijent sobr var o meno?
 Mes petra int hirio an deiz?
 -Evel a 'viscoas tud direis,
 -Evel a ziaguent diveset,
 Mezierrien ha mezierezet.
 Ne lavaràn qet gouscoude
 Ve impossabl d'ar seurt tud-se
 Donet da veza réglet mat,
 Hac o habitud da guittât;
 Rac beza o deus mil moyen
 Da en em gönüertissa crenn;
 Mes, siouas! ne fell qet dezo
 Ober usaich eus anezo.
 Ar volontez deo tout a vanq,
 Ha nonpas ar c'hraçz puissant;
 Ar viçz eus o mesvenliou
 O dalc'h en o habitujou,
 Ha contant en o esclavaich,
 D'e guittat ez int digouraieih.
 Ar mezier zo ean hitropic:
 Seul ma'c'haval, seul an itic
 -A drantel en e vouzellou

-Hac a c'houlen galopinou ;
-Hac en oad seul mac'h avançz,
An nerz eus e intemperançz,
Maguet gant qement a sourci
Peb moment en hostaleri,
A deu da boulsa e grisiou
Seul-donnoc'h en e entraillou ;
Dre-gonsecant e ten enhâ
Seul-diessoc'h da barea.


Pa vezø ar mezier scöet
Gant ar fulor eus ar c'hlénved ,
Nemet chom a rae en hentchou
Da vernel gant re gorfadou ,
E tetesto e habitud ,
Ar goal vuez a rea d'e dud ,
Ar goal exempl en deus roet
Dre guement plaçz m'en deus baleet .
Côves a rai e bec'hejou ,
Marteze gant calz a zaelou ;
An absolven a recevo ,
Ha sacramantet oll e vo ,
Mes credi a raimp-ni neuze
E vo salvet var guementse ?
Petric' sonjit-hu , christenien ,
Deus sort eternel eur seurt den ?
Test oc'h bet eus e zisursion ,
E gass a reot-hu d'an èevou
Etouez ar Zent hac an Èles ,

-Goude un hevelep buez?
 Ah! casi sur me lavaro
 Ez eo mezier bete'r maro,
 Ha risqet dre ze da vervel
 Coupabl eus ar pec'het marvel.
 Mont a rai eta ar mezier
 D'an ifern da gaout Lucifer:
 Efet en deus er vesventi
 Coler e Zone betec al ly,
 Ha da james ar reuseudie
 E qever ar fals pinvidic
 -A lounco hac a zislouco
 -A leiz gouzouc ar vestl c'huero
 Eus a arraich an diaoulou
 -E creiz eur bar a dourmantchou.
 En eur sonjal e qementse,
 Piou ne scrijo qet, va Doue!
 Ha gouscoude an træsennet
 Hac iveauz ar meziereset,
 Heb an distera tam chagrin
 A veler o vont d'o zrein
 Qen disculpul, qen disourci
 Ha pa vent sur da bossedi
 Eur gurunen tout a c'hloar
 En eur vont divar an douar.
 Ne sonjont nemet er voyen
 (Ha ne deo qet güir, mezierrien)
 Da gontanti o fassion


- Hac ar youl démeus o c'halon;
 - D'an ampoënt ma tlefent guelet
 Dorn gallondus un Doue savet
 - Azioc'h o fenn d'o ecrasi,
 Pa na cessont d'en outraji
 Dre eur chaden a zebanchou
 Hac ur môr a vesventiou.

Crenit, crenit oll, mezierrien,
Rac redet a rit d'an ifern,
 Hac eur pas c'hoas ma' c'havancit
 En e greiz e precipitit
 Ho corf qercoulz hac hoe'h ene
 Evit an oll eternite.

Chetu penaus ar vesventi
 Ho malheur eternel a rai
 Goude ober deoc'h var an douar
 Ha mil tourmant ha mil glac'har.



D I F I N V E S.



Ah ! mesventi, viçz detestabl !
 Oh ! habitud abominabl !!
 Ra zeuyo an oll gristenien
 Da renonbez did a visiqen !!!

.....
 Grit eta hirio, we ho ped,

Mezierien ha mezierezet,
 -Eur sell a druez ouz hoc'h ene,
Miserere animæ tuæ;
 Rac, allas! dre ho tebauchou
 E c'hassot souden d'ar flammou.

.....

-Coll ho c'henor bac ho tanves,
 Coll ho tyec'het hac ho puez
 -A zo, sionas! nebeut a dra
 Vis-a-vis d'ar maleur cris-mâ.

.....

Ma na ra qet impression
 -Varnoc'h eta ar rann-galòn
 A rit dre ho mesvention
 Hac ho tizurs d'ho familliou,
 Da viana ra viot touchet
 Dre an tourmantchou diremed
 A breparit e creiz an tân
 Evit james deoc'h oc'h-unan,
 Evit ma reot ouz oc'h ene
 A la fin eur sell a drue;
Miserere animæ tuæ.

Evelse bezet grêt. +

FIN.

30

